

29650 GUERLESQUIN

CANTIQUE à SAINT MAUDEZ .

Refrain - Aotrou Sant Vaudez, hor Patron,
Dalc'hit ar feiz en hor c'halon,
Feiz birvidig hon tadou koz,
Ma z'aimp ganto d'ar Baradoz.

1- Ho tad, ho mamm, tud a feiz krenv,
A zisk, aeze deoc'h hent an nenv,
En o falez, c'hoaz bihanig,
C'houi oa santel 'vel eun aelig.

2- Euz Iverzon, brema me 'vel
Eur vag, he gouel frank en avel,
O lamet war goumou ar mor,
Hag o touara en Arvor.

3- E douar Breiz, c'houi peuz hadet
Feiz krenv hag a zo diwanet,
Hag eost mad en deuz bet Doue
Da zougen da c'hrignol an Ee.

4- C'houi a zo karet en hor bro,
Dister ar vouez a lavaro
Nerz dispar ar brezegennou
Ha niver bras ho purzudou.

5- An dud klanv, an dud ma'hagnet
Dreizoc'h o deze ar iec'hed;
An drouk-spered pell a dec'he,
Hag an dud dall, sklear a vele.

6- Sant Vaudez, roit adarre
Da gement zo klanv ar pare;
Ra vo gwelet c'hoaz peb Breizad
O vale eun war en hent mad.

7- Ha peb kristen a lavaro,
En hor parrez ha tro-war-dro
En Env Zant Vaudez evurus,
War an douar zo galloudus .



=====